

MANDAMAND

AOTROU'N ESCOP KEMPER HA LEON,


EVIT

CORAÏZ 1864.



KEMPER,

MOULET GAND AR. DE KERANGAL, MOULER AN ESCOPTI.



MANDAMAND
AOTROU'N ESCOP KEMPER HA LEON,
EVIT CORAÏZ 1864.

Rene - Nicolas SERGENT, dre c'hraz Doue hag hon Tad Santel ar Pab,
 Escop Kemper ha Leon, hag unan euz an Eskibien hanvet gand
 PII IX da azeza e kichen he dron,

*Dar Veleïen ha d'ar Gristenien fidet eus hon Escopti,
 salut ha bennos en hor Zalver Jésus-Christ.*

HOR BREUDEUR KER,

Varlene, d'ar poent-ma, he pedemp ac'hanoc'h da rei eun tol
 lagad piz var hor Zalver Jesus-Christ, hag en eur bedi ac'hanoc'h
 evel-se hor boa c'hoand ober d'e-hoc'h, en eur heulia anezhan,
 clask an *hent*, ar *virionez* hag ar *vuez*. Hirio e teuomp da lava-

ret d'e-hoc'h ez eo red, evit caout ar penn kenta d'euz an hentse, evit heulia ar virionez-se, evit beva d'euz ar vuez-se, ober evel m'en deuz gret Jesus-Christ, rac n'en d'eo deuet er bedman nemed evit beza scouer an holl.

Nan, n'hellomp ket chom heb ober evel m'en deuz gret hor Zalver, mez heulia anezhan a zo cun dra dudiuz meurbet.

Lekeomp a gostez, hor Breudeur ker, ar brezel disleal gret a-nevez so da Jesus-Christ; rac, da guenta, an darn vrassa ac'hanoch'a zo chistenien vad ha start, ha n'ho deuz ezom ebet da veza disfaziet var guement-se; ha, d'an eil, ar re a helfe beza bet desevet gant scridou an doctored fallagr, ar re-ze iveau a dle beza bet slerijennet gant scridou an doctored santel; rag, ar rema, ez euz eun niver braz anezho ha ken scler ha ker cre int, ma ne lezont tevaljen ebet er sperejou.

An herezi a zo merc'h d'an urz fall, ba ne hell en em skigna dre ar bed nemed e creiz an devaljen, evel-se pa deu d'en em ziscul d'an daoulagad e kemer peurvua, calz pe nebeud, doare ar virionez evit troumpla an dud a feiz vad; mez dioc'h-tu ma teu sclerijen ar virionez da bara, tevaljen ar c'hredennou faoz a renk pellaat; ia, goude ar scridou guirion, ne chom netra, nan, netra deuz ar c'hredennou faoz prezeguet dre scridou an dud diffeiz. Siouaz! caer e deuz ar virionez ober, an drouc-spered, evit-han da veza bet trec'het, ne ehan ket, labourat a ra a-nevez, renfevezi a ra he vrezel en eur c'hiz-al evit clask, d'he dro, discar ar virionez muia ma hell en he hent.

An Iliz, hi, hor Breudeur ker, diazezet mad var mean a virionez, a zo ato anat da zaoulagad an holl, rac skeuduz eo evel an heol; netra na hell ober d'ezhi finval, rac stard a cre

eo var he mean dialez graz d'an urz lakeat gant Jesus-Christ etre galloud ar re a c'houarn anez-hi ; gouzout a oar kenderc'hel, e peb amzer, scler d'an holl, ar guirioneziou diskennet d'euz an Env ; difen a oar, e peb amzer, hini hag hini, gand ar vrassa aked, an holl guirioneziou euz ar Feiz, ha, carguet ma z-eo da zisen an tenzor fiziet enhi gand ar Mestr divin, an Iliz, mam, merc'h ha rouanez, a zispris fallagriez ar bed, fallagriez an ifern p'ho guel o tremen var an douar. Seul-vui a vrezel a vez gret d'an Iliz, seul-vui he cresp, seul-vui e clasker discar anezhi, seul-vui he crenva, ha Sant Gregor en deuz lavaret gant calz a virionez : *Santelez an Iliz ne ra nemet luguerni mui-hoc'h-mui pa glasker he saotra*; ha Sant Hiler a lavar ouspen : *Guir an Iliz eo trec'hi pa rer brezel d'ezhi, ha skigna a ra mui-hoc'h-mui he sclerijen, ha gounit a ra eun niver brassoc'h a galonou pa ve stourmet out-hi, ha gounit a ra an holl pa vez dilezet.*

Ar pez a zeu a spered an den, hor Breudeur ker, ne bad ket pell amzer, a dremen buhan evel eur skeud. Ar pez a zeu a Zoue a zo dishenvel a guement-se. *Jesus-Christ, hen, a oa deac'h, a zo hirio hag a vez da viken.* Doue eo en deuz digasset anezhan var an douar, hag ar guirioneziou a zesk d'eomp a bado bepred, *an env hag an douar a dremeno, hag ar guirioneziouze ne dremenint ket.* Pe e plijo pe ne blijo ket d'an dud, buez Jesus-Christ a zo dreist an holl draou-all var an douar, buez Jesus-Christ a zo bet hag a vez ene ar bed. An dud just a oa araoc Jesus-Christ ho deuz huanadet o c'hortoz he zonediguez, hag ar re a zo deuet var he lerc'h a renk servicha anezhan hag heulia he vuez, rac n'heller eeuna ar plegou treuz, na brida an techou fall d'euz ar galon nemed en eur labourat da veza henvel euz *

Jesus-Christ. Honnez eo lezen ar christen. Natur fall an den ne
ehan da glask eun abek benag evit miret da zouja d'al lezen-
ze , ha setu perag , e peb amzer , ar sperjou hag ar c'halonou
dijuj ho deuz gret brezel da Jesus-Christ , pe evel Doue , pe evel
den , pe evel Doue ha den assamblez. An Doctor Sant Leon a
anaveze mad kement-se pa scrive da heretiked he amzer : « N'he-
« lent ket credi an eil heb eben euz ar virioneziou-ze , hag e oa
« eun drouc ker braz credi ne oa hor Zalver adorabl nemet Doue ,
« evel credi ne oa nemed den. »

Jesus-Christ, hor Breudeur ker, en deuz roet da anaout scler
an diou virionez-se , da lavaret eo, e oa Doue ha den. Da guenta
e oa den, en eur c'houzanv an naoun , ar zec'hed , ar poaniou
evel bugalez Adam. Scuizet eo bet, sculliet en deuz gret daelou,
en eur guer, gouzanz en deuz gret an traou tenna er bed-man.
D'an eil , *e oa Doue* , en eur ober ar burzudou brassa dre he-
c'halloud he-unan. He ziskiben , eme Zant Chrisostom, a oa soue-
zet braz, o velet ar mor o plenaat dindan he dreid, o velet ar
barrou-amzer o tevel gand eur gomz hepken d'euz he c'chinou ,
comz a rea evel eun den hag en doa galloud anezhan he-unan,
ha ne gomze ked en eur c'houlen sicour evel ma ra ar Zent pa re-
ont burzudou. Gallet en deuz *en em ober par da Zoue*, rac guir
en doa evit kement-se, eternel , holl-c'hallouduz , mad-meurbet
santel ha parfed-holl. O Verb eternel , c'hui eo hoc'h euz crouet
peb tra ha dreizoc'h hoc'h-unan ! O Mab ar Verc'hez-Santel ,
dreiz-oc'h eo bet renevezet ar bed ha saveteet an holl-dud.

Ar Batriarched hag ar Brofeted, hor Breudeur ker, a skeuden
Jesus-Christ, a goms divar ben Jesus-Christ ha dre Jesus-Christ :
Adam, couezet dre he bec'hed, a vel e Jesus-Christ an hini a

dle beza he Zalver ; piou ne velo ked e goad Abel sculliet gand he vreur Caïn, goad Jesus-Christ sculliet var menez calvar ? E Noë pa ra he arc'h, piou ne velo ket Jesus-Christ ho sevel he iliz a zianveaz pehini n'ez silvidiguez ebet ? E Josef guerzet gand he vreudeur, Jesus-Christ guerzet tregont diner ? E Moïzez pa vlein ar bobl a Izrael trezeg an douar prometet , Jesus-Christ o c'hencha ac'hanomp var hend ar baradoz ? E Jozue , Gedeon, Barach , Samson , Jeste , David, hag e Judas Machabee hag he vreudreur, Jesus-Christ o combati eneb prinse an devalijen ha fallagriez ar bed ? Ar re-ma a skeudenne oberou Jesus-Christ , re-all ho deuz skeudennet he vertusiou : Abraham he oboissanz, Izaac he zoujanz, Jacob he basianted. Ar scritur sacr a zo leun a skeudennou misteriuz evel ar re-ze, skeudennou gret evid ober da zaoulagad an holl trei var zu Jesus-Christ pehini a zo ar virionez skeudennet er scritur.

Setu ama breman , hor breudeur ker, eun dra hag a ro da anaout peguen huel eo savet ar C'hristen, ha peguen divin eo hon religion. Hor Zalver Jesus-Christ, her gouzout mad ha rit, a zo meurbet savet dreist an holl dud hag an holl eled, piou a helfe en em zevel betec mab Doue ? Ma, coulzcoude, e tleomp, heb aoun ebet, bale d'he heul, camed ha camed, ha clask diguezout beteg en-han , beza e peb tra henvel out-han. Eur gourc'hemend eo gret gant Doue an tad evidomp, selaouit he vouez var bord ster Jourden pa scullie Sant Ian-Badezour an dour var ben Jesus-Christ : *he-ma eo va mab muia caret, en-han em euz lakeat va holl flijadur* ; ha var menez Thabor dirac tri euz an ebestel : *selaouit anezhan*.

Hor Zalver Jesus-Christ he-unan a zo en em roet d'eomp evit

scouer en eur lavaret : *pa vezin savet var ar groaz, neuze he-tidennin an holl da ved-hon.*

An den hepken a zo gret da henvelediguez an Aotrou Doue. An holl draou-all en dro d'an den ho deuz ives eun draic bennac d'euz an henvelediguez-se, hini coulzcoude d'euz an traou-all crouet n'eo ken henvel oc'h Doue evel an den.

Pa roer eun toll lagad var an traou crouet ec'h anavezer ez euz eun Doue, evel ec'h anavezer ez euz eun artizan pa veler eul labour c'hret bennag. Roomp eta eun tolic lagad var ar bedman : Nag a draou calz ha burznduz ! Piou a helse niveri an traou crouet ? Ma ! An niver deuz [an traou estlamuz-se ken dishenvel etrez-ho, al louened hag ar pez ho guelomp hoc'h ober, ar plant ha vertus peb hini d'euz ar plant-se, an urz ken dudiuz a ren etre an holl draou crouet, kement-se holl a lavar ez euz hag e renk beza eun Doue. Rag an traou-ze holl n'ho deuz ket gallet en em ober ho-unan a netra, eur dorn holl-c'hallouduz benag he deuz renket croui anezho. Hoguen, hor Breudeur ker, pa eo guir ez euz eur vertu benag en holl draou crouet, ez eo guir ives en em gav an holl vertusiou-ze en hini en deuz ho c'hrouet, rac n'en divije ket gallet rei d'ezho ar vertusiou-ze ma n'en divije ket bet anezho enhan he-unan.

Eun tol lagad ive brema var an den.

An den, hen, ne ma ket var an douar evel an traou crouet n'ho deuz buez ebet; an den, hen, n'en deuz ket hepken eur vuez evel ar plan a zivoan, evel al louened a zant, beza en deuz ouspen eur spered evel an eled. Doue en deuz gret d'euz an den roue ar bed-holl, peb tra a zo bet lakeat dindan he zorn, peb tra a dle douja d'ezhan evel : al laboused a nij en ear, al

louened a vale var an douar, an douriou a red, ar mor hag he besked. Gant he spered an den a hell anaout traou ar bed-man.

Ouspen, hor Breudeur ker, e ene an den e veler eur skeuden a Zoue, a setu ama penaoz. E ene an den ez euz tri c'haloud : ar memor, ar skiand hag ar volontez. Abalamour d'an tri c'haloud-se, Sant Augustin ha Bossuet a gav en den eun henvelediguez gant Doue. E guirionez ene an den a zo evel pa lavar-femp *infinit* pa ez eo guir dre ar zonj ec'hell pac a peb lec'h, n'hell ket beza rannet ene an den ha, mervel, ne reio ket. An ene ze a zo e corf hag e peb loden a gorf an den, ha n'hell ket coulzcoude beza rannet, beza bihanneet, na mervel.

Savomp brema hon daoulagad hueloc'h. Lezomp corf an den hag he skianchou, ha roomp eun tol lagad var an ene-ze hag he donezonou divin.

Evit croui ar bed a veler, Doue n'en deuz lavaret nemed eur goms; evit croui an den Doue en deuz dalc'het conseil. Perac kement-se? Crouidiguez an den a oa eun dra dreist an holl draou-all. An Drinded Santel a oa evel en em glevet : Doue an Tad a ro d'an den d'euz he c'haloud, ar Mab d'euz he furnez hag ar Spered-Santel a garg an den d'euz he zonezonou, hag an donezonou-ze a reaz luguerni var an den eur c'hened ker vraz ma plije da Zoue. An henvelediguez-se gant Doue, an den a helle he c'holl, he c'havet a-nevez, he bihanaat pe he c'hreski. Ia, an henvelediguez-se a heller da goll, ha, Siouaz ! ne goller anezhi nemet re aliez. N'euz nemet Doue hag a chomfe bepred ar memez hini.

Etouez an holl donezonou roet d'an den en em gave al *liberte*, donezon faziuz meurbet. An den eta a dlie tol evez evid en em

guenderc'hell er stad caer e pihini e oa bet crouet hag evit heulia bepred lezen he grouer. Gret en deuz, Siouaz! Evel an drouged, ancounac'heet en deuz ar stad enorabl e pehini e oa bet crouet, ha couezet eo en eur ober he ben he-unan. Goude he lam coulzcoude e c'hell c'hoaz distrei d'he henvelediguez gant Doue, evurusoc'h e kement-se egued an eled pere ho deuz collet ho hini da virviken.

An tri Ferson euz an Drinded Santel, pere a oa en em glevet evit croui an den, a zeu c'hoaz d'en em glevet evid ober he zilvidiguez, ha setu ama penaoz. En hano an Drinded Santel e ve badezet an den. An dour er vadiziand, cvel an daelou er binjen, a vuelc'h ar pec'her, hag a reneves henvelediguez Doue en he ene. Guelit ama trugarez an Aotrou Doue evid ar pec'her; ar miritou collet dre ar pec'hed, en em gav a-nevez e ene an den pa zistro da Zoue, hag ar miritou-ze a hell creski, evel a ziaraoc dre an oberou mad. Evel-se ives ez eo scrivet : *an hini a zo just a dle creski e justiz, hag an hini a zo santel a dle creski e santelez.*

E leor ar Genes ne velomp ked e lavarfe Doue goude beza crouet an den, evel ma lavar goude beza crouet an traou-all : *mad eo.* Perac ? abalamour an heol hag ar c'hrouadurien-all a oa gret, er penn kenta, en eur stad a barfeted, e leac'h an den, hen, n'en d'oa ked ar stad-se a barfeted a helle da gaout. An den, hen, a dlie labourat, gant sicour graz Doue, da zont d'ar stad a barfeted evit pehini e oa gret, ha da behini ne ziguezo nemet pa ielo d'euz ar bed-man. Ia, neuz e hepken e c'hell clevet he Vestr divin o laveret d'ezhan : *Deuet, servicher fidel,.... buguel benniguet va Zad,....* neuze hepken e c'hell caout an *henvelediguez parfed gant Mab Doue.*

Ne ancounac'haomp ket eta, hor Breudeur her, e renk an den beza henvel deuz hor Zalver Jesus-Christ, rac dor ar baradoz ne vezò digoret nemet d'ar re a vezò henvel deuz Mab Doue. Digarez ebet da lacaat araoc. Jesus-Christ a zo deuet var an douar, bevet en deuz e-touez an dud evel pephini ac'hanomp evit beza scouer an holl. Ma n'ho deuz ket bugale Caïn troet ho daoulagad varzu enhan, bugale Seth ho deuz gortozet anezhan. Ar zonj euz ar Messi, pehini a oa Jesus-Christ, a rea da galon Abraham, Moïzez hag ar Brofeted dridal. Pa eo deuet var an douar, evit beza gueled guelloc'h gand an holl, ez eo pignet var menez Calvar, ez eo bet staguet enho var eur groaz huel; ha setu aze ar scouer a dleomp da heulia, an hini n'hen heulio ket, baradoz ebed evit-han. Hen eo en deuz digoret an dorojou serret aboue pec'hed hon tad kenta Adam, hag an dorojou-se a chomo ato serret evit kement hini n'ho devezo ked a henvelediguez gant Jesus-Christ an eil Adam. An nerz pe ar zempladurez, ar iec'hed pe ar c'hlenved ne d'int netra ma n'ho lekeomp ket da dalvont evid ober ar pez a dleomp dreist peb tra, me a sell d'in lavaret, evit beza henvel oud Jesus-Christ.

Peb stad, peb renk, peb carg, hor Breudeur ker, a zeu a Zoue, hag en-ho e c'hellomp ato labourat da c'hloar Doue, gand e vevimp hervez aviel hor Mestr divin. Ar re a zo er stad santel d'euz ar briadelez a dle beza unanet evel ma'z-eo unanet e Jesus-Christ natur Doue ha natur an den; ra vevint e peoc'h evel ma vev Jesus-Christ gand an iliz he bried; an hini a renk labourat ha gounit he vuez gant poan he zivrac'h, a dle kemeret scouer zar sant Josef; an hini a drafic a dle heulia lezennou al lealded en eur verza hag en eur brena, evit dont a-benn da akuizita an tenzor a zo en env; an den a vrezel en devezo sonj ne dlc ket combati hepken eneb

enebonrien he vro, e tle c'hoaz combati eneb enebourien ar religion ; ar scolaer a studi evit beza den desket, a heulio Jesus-Christ dirag an Doctored, ha pa vezo desket, a reio evel-t-han, a zelaouo gand madelez ar re ho deuz nebeutoc'h a zescadurez evit-han . hag e scol Jesus-Christ e tesco disprizout ar skianchou fallagr pere ne lekeont nemet credennou saoz er sperejou ha breinadurez er c'holonou. An dud a gark lakeat da renta justiz d'an holl, ho devezo sonj bepred d'en em zerc'hell dirag Jesus-Christ pehini en deuz *heuliet al lezen hep tremen an distera iota* ; ar manac'h en e gouend, a zalc'ho bepred he spered hag he galon savet var-zu an env evel ma rea Jesus-Christ ; ha Pastor an eneou, a ielo bepred varlerc'h Jesus-Christ en templ sacr, en heulio pa rede varlec'h an danvad dianket pe glanv, hag a zigoro bepred he zivrac'h hag he galon d'ar buguel prodig evel he vestr Jesus-Christ.

Lakeomp da dalvout, hor Breudeur her, an holl guentelliou-man, ne ancounac'haomp ket e tremen buhan traou an douar, ha ne glascomp, e creiz darvoudou, poaniou ha trubuliou ar bed-man, nemed eun dra, chom bepred stard e graz Doue.

Ar stad e pehini omp lakeat gant Doue a reio deomp tostaat aliesoc'h d'euz menez Calvar eguet d'euz menez Tabor. Doue ra vezo meulet hag he hano glorifiet; ar C'halvar a zo guelloc'h egued an amzer, hag an Tabor evidomp a vezo baradoz Doue.

Hor Zalver Jesus-Christ n'en deuz ked hepken prezeguet d-eomp ar pez a dleomp da ober evit beza henvel out-han, lakeet en deuz he oberou, he vuez dirag hon daoulagad ha lavaret d-eomp : *M'ar gouzoc'h an traou-ze heullit anezo hag e viot evuruz.* Deski en deuz gret d-eomp ar zonjou mad a dleomp da gaout, hag an doare d'ober hon euvrou evit ma vezint henvel d'euz

he re. Holl e c'hellomp arruout da veza henvel out-han , da veza contet en niver euz ar re just er Baradoz. An abostol Sant Ian a velaz eun deiz al leac'h dudiuz-se en eur zonj misteriuz.
« El leac'h-sc , eme an Abostol , n'euz mui a devalijen , hag a
« bep costez ez euz dorojou skeuduz-meurbed ha bepred digor , evit
« rei deomp da anaout e c'hal!er arruont enhan a bep stad , a bep
« micher en eur heulia hent ar Feiz , an Esperanz hag ar Ga-
« rantez . »

Da guenta en eur heulia hent ar Feiz.

An hini , eme an Abostol Sant Paol , en deuz c'hoant tostaat deuz an Aotrou Doue a renk credi enhan , ha credi e recompanso ar re a glask anezhan . An Doctored santel ho deuz lavaret e'z-eo ar Feiz buez skiand an den , ar sclerijen a vleine an Israelited var hent an Douar-Prometet , ar raezon a laca da netra raezon furnez ar bed-mau , an arm gant pehini en em zifennner e combajou ar zilvidiguez , ar verelaouen a zao araog an heol , ha stereden an Nord evid ar re a ra hent var mor counnaret ar bed . Araog an Doctored-se ha calz guell eguet-ho , an Abostol Sant Paol en doa lavaret ez eo ar Feiz : *Ar mean var behini eo diazezet an traou a esperomp , ar merg-anad d'euz an traou ne velomp ket .* Ia , dre ar Feiz , an traou a esperomp a zeu da veza ker guirion evidomp evel pa vent brema dindan hon dorn . An traou-ze a zo er Feiz evel ma ar pland en had , ar vezen neket c'hoaz divoanet ha coulzcoude he ma en he fez er spluzen a behini e tle divoan en he amzer . Evel-se ive traou ar bed-all , evit-ho ne dint ket c'hoaz dirag hon daoulagad , a zo guirion evidomp dre ar Feiz ; rag an holl draou a bromet d-eomp a arruo , hep mar ebed , en amzer merket gand Doue .

Mar e ma guirioneziou ar Feiz en devalijen, ar merkou dre
bere he ro Doue d-eomp ar gnirioneziou-ze da anaout a zo sclear ha
luguernuz, hag ar sclerijen-ze a zo ker braz, ma rencomp ho
guelet nemet serri a rafemp hon daoulagad.

Ia, ar Feiz eo ar guir hent, an hent royal evit mont da Zoue.
Ma vec'h e beach, ha ma cafec'h, a zeo hag a gleiz d'an hent,
en eul lannec vraz goloet a rez hag a spern, tud calz harpet,
troet a beb tu, a pere a astense ho daouarn, pephini d'he du evit
lavaret d'e-hoc'h : he-ma eo an hent mad ? Ha n'ho pefe ked
a druez out-ho ? Eo, hag ho c'hemeret a rafec'h evit tud diskiantet.
Eun den desket braz ha calz brudet a oa leun euz an druez-
se evid an dud euz he amzer ne heulient nemed ho raezon ho-
unan, hag a layre d'ezho : « Red ho pefe, emezhan, collet ho
« penn pa ne credit ked an Aviel, prezeguet gand an Ebestel,
« prezeguet gant kemend a Zent hag a Zoctored, siellet gand goad
« ar Verzerien, prouvet dre guemend a viraclou, discleriet gand
« an heol, an douar, ar mor, anzavet gand an drouc-spere-
« jou en despet[d'ezho]. Ia, red eo beza diskiantet evit reuz a-
« naout eun doctrin curunet a guemend a victoriou, hag he deuz
« trec'het var kemend a enebourien. »

Neked avoalc'h heulia hend ar Feiz, red eo iveau d'an eil, heulia
hend an Esperanz.

*Savet em euz va ene trezeg en-hoc'h, o va Doue ; lacaat a ran
va fizianz en-hoc'h, ha ne vezin ket troumplet ! a lavare ar roue
David. Evel-t-han lakeomp hor fizianz e Jesus-Christ, distagomp
hor c'halon euz an traou vean, dister ha trompluz e pere hon
euz lakeet hor fizianz er bed-man, hag hastomp da vont da derri
hor zec'hed da eienen ar madou guirion. E piou e lekeimp-ni hor*

fizianz ma n'hen leckeomp ked e Doue? Hag hen ne hell ket peb tra evidomp? Ha n'en deuz-han ket c'hoant d'ober peb mad deomp? *Dalc'homp eta hor fizianz enhan, rac fidel eo d'he c'her ha d'he bromessaou.* N'euz nemet Jesus-Christ hag a helfe paea ar pez zo dleet da justiz Doue. Pec'herien abaoue ar penn kenta, n'hor bije ket gallet en em zavel ma ne vije ket plijet gant Doue, hor boa offanset, digaz he vab unic da bledi evidomp ha da lacaat terri ar zetanz a varo douguet en hon eneb, hag ar mab adorabl-se en deuz gret evidomp calz muioc'h egued hor bije credet esperout.

Ia, hor Breudeur ker, Jesus-Christ en deuz paet evidomp en tu-all d'ar pez hor bije sonjet ha ni hag an eled. Evid en em lacaat etre Doue ha ni, eo diskennet d'euz an env, en em c'hret den, en em verzet evidomp; a gof he vam da guenta, var ar groaz goude hag hirio en tu deo d'he dad he pled evidomp evel eun advocad etre he dad ha ni pec'herien. Ar gouliou gret gand an tachou ha gand al lanz a zao huelloc'h ho mouez c'hoaz eguet goad Abel, ar pedennou a reaz guec'h-all var an douar evidomp en eur scullia daelou a zao hirio c'hoaz beteg tron he dad evit ma talvezo evid ar bec'herien ar zacri-fic euz he vuez.

Er messi promettet, da lavaret eo, e Jesus-Christ, e lakee Abrac'ham he fizianz pa espere en divije d'euz he vab Izaac, a ie da lacaat d'ar maro, eun niver a vugalez ker braz a niver ar stered a barr er firmamant. E Jesus-Christ eo e lakee Suzanna he holl fizianz pa valee d'ar maro. Judith a lakee enhan he holl fizianz er eur vont, heb sicour den, da zavetei ar guer a Vethuli; ha Daniel hag he vreudeur a lakee ives enhan ho

fizianz pa valeent trezeg ar fourn c'horet pe toul al leoned.

Ha c'hoant hoc'h euz, hor Breudeur ker, kenderc'hell an esperanz-se stard en ho calon ? Divoallit d'euz ar brezompson pe an disesper.

Ar bresompson, hi, a zonj gat-hi gounit donezonou an env en eun doare ha neked hini Doue. C'hoand e dese, evel an here-tiked, hanvet ar Pelagianed, miritout grasou Doue dre oberou naturel, pe evel ar botestanted, bugale Luther, caout gloar ar baradoz hep an euvrou mad. Ne veler nemet re a gristenien catholic pere, en eur varn an heretiked, a deu da fazia var drugarez an Aotrou Doue.

Eur pec'her benac, guir eo, a zo bet salvet en eun doare vur-zuduz, dre eur c'hraz a n'anavezomp ket; kement-se a zo diguezet dibod a vech; ar pez a ziguez peurvuia eo, goude beza collet an deveziou, ar miziou, ar bloaveziou hep ober netra evid ar baradoz, calz, Siouaz ! Pa zeu ar maro, n'ho deuz neuze nemed eun nebeudig amzer evit tec'het d'euz an ifern.

Sonjal beza salvet hep sicour Jesus-Christ, hep heuilla Jesus-Christ, a zo eur zonj vean. Ar zonj-se a denfe euz hor c'halon an esperanz guirion. D'euz eur c'hostez-all, an disesper a hell ive hor c'holl. Guelit eul lestr en eur barr-amzer, pe ez eo tolet gand an tarsou var eur roc'h, pe n'hell ket tec'het gant re nebeud a zour, n'euz fors penaoz, en em goll a hell.

Ar re ho deuz re nebeud a fizianz a zonj gat-ho e renker ober brezel da enebourien n'heller ket da drec'hi, ha dinerzet evel-se gand al lezireuez, ne reont netra, ne lekeont ket da dalvout an nerz ho deuz hag en em goll. Ma n'heller ket tamal ar seurt tud-se abalamour d'ar pez a zonjont, e tleont beza tamallet abalamour d'ar pez

ne reont ket. Ar re a ra evel-se ne lavaront ket a c'hinon e reuz Doue d'ar pec'her ar c'hraz d'en em zavetei , ar pardon d'euz he bec'hejou, guir eo, mez, siouaz! pephini, evit-han he-unan, a gret n'en devezo ket a c'hrasou gouest d'her zicour , ez eo re zister ar sicour en deuz en he stad, ez eo eun dra re ziez ar zilvidiguez, ha perseveri, kenderc'hel er mad eun dra chansuz braz. Goude beza bevet el lezireguez, er plijadurezou, en dizurzou eo just beza castizet en doare-ze.

D'an drede e renker heulia hent ar garantez.

Ar garantez, eme an Abostol Sant Paol, a grenva ar Feiz hag an esperanz. Ar vertu-se a garr Doue evit-han he-unan hag an nessa abalamour de Zoue, goalc'hi a ra eun niver braz meurbed a bec'hejou , ober a ra ac'hanaomp mignonned da Zoue an Tad, ha kenvreudeur da Jesus-Christ , galvet evel-hau da rouantelez an env; dre ar garantez eo e chom hor Zalver en-omp ha ni enhan Er garantez-se eo e teuaz ar guerc'hezed fur a bere e comz an Aviel da elumi ho lamprou ; ar garantez-se eo ar guiscamand eured hag an hini n'en dougo ket a vezo sclapet e meaz ar banked; skeuduz evel an aour etouez ar moneiz-all, evel an heol etouez ar stered, evel ar serafined etouez an eled-all, hi eo an ere a unany a barfeted an eneou da Jesus-Christ , hag en eun doare ken stard ma n'heller ked ho distaga d'euz carantez Doue.

An hini en deuz ar garantez-se, hor Breudeur ker, a zo henvel deuz Jesus-Christ a zo bet douz hag humbl a galon; *patiand-eo*, ha gouzany a ra an droug a rer d'ezhan. *N'en deuz ked a avi d'euz ar re-all*, ne zezir netra er bed, penaoz e c'helfe beza c'hoantec d'euz madou ar re-all? *Ne deu ket den em c'houeza gand an our-gouil*, ha n'en em zav dreist ar re-all nag abalamour d'he spered,

nag abalamour d'he gorf; *n'en deuz ked a ambision*, ne sonj nemed er pez a dle derc'hell he galon hag he goustianz e stad vad, hag evel-se traou ar bed n'hellont ket treina anezhan d'ho heull; *ne glask ket memez ar pez a hell beza talvoudec var an douar*, rag an traou talvoudeg evid ar bed-ma, n'int ket traou talvoudeg evit-han; *n'en em fach ket*, leun eo a vadelez evid ar re a glask noazout d'ezhan, *ha ne zonj morse drouc d'euz den ebet*; ma tamal an oberou fall, ne damal ked zonj ar c'halonou, lezel a ra an Aotrou Doue da varn ar pec'her. Ia, an hini en deuz ar garantez-se en he galon a gred start guirionezou ar Feiz, a zo leun a esperanz er pez en deuz prometet Doue, heg a c'houzanz ar pez a ziguez da c'houzanz, hag a vale evel-se laouen varlerc'h he scouer divin, pehini a heulio er bed-ma hag a reio he evurusted er bed-all.

Evid ar pez a zell euz ar C'houaïz :

Goude beza en em glevet gant hor Breudeur venerabl ar C'ha-lounied ha Chabist hon Iliz cathedral, *hon euz gourc'hemennet hag e c'hourc'hemennomp ar pez a so aman var lerc'h*:

I.

Gallet e vezò dibri amann, leaz ha fourmaj epad ar c'houaiz, ha viou beteg ar zul bleuniou har d'ar zulvez-se.

II.

Ar Bersoned a hello rei ar galloud da zijunia ha da zibri kik d'ar re euz ho farresioniz her goulennno digant-ho, hag ho devezo eur ræzon vad benag evit kement-se.

III.

Ar Barresioniz ho devezo bet an dispanz-ze, a dleo creski ho aluzennou, evit satisfa da Justiç Doue.

IV.

Ar Bastored a hello avanz an amzer Fask eun nebeud araog an amzer merket gand an Iliz, hag hen asten eun nebeud en tu-all ; coulzcoude ne dleint ked en em bellaat re, e penn ebet, diouz an amzer merket gand an Iliz.

Hag e vez ar Mandamant-man lennet a vouez huel da brôn an oferen-bred er zulvez goude ma vez diguezet er parressiou.

Roet e Kemper, dindan hor zin hag ar sciel euz hon armou, ha sin Secretour hon Escopti, ar 25 a viz Guenver 1864.



+ RENE,

ESCOP KEMPER HA LEON.

Dre vandamand An Aotrou'n Escop :

TÉPHANY,

Secretour.

